

AR BEREN DAOULET

Gant Y. DANIEL (Tredaner)



1
Me em euz eur beren daoulet,
Gant ann holl a he c'hoanteet.

DISKAN

Ma dousik koant,
Koant, koant, koant,
Ma dousik koant
Deuz a Wengamp.

2
Homan a zo eur beren goant,
Kaved n'eur jardin en Gwengamp.

3
Evit dei d'a vezan taoulet
Biskoaz den n'a neuz e blonset.

4
Deuz a Bariz deuz an Naoned
He teu tud yaouank d'he gweled.

5
Donned e ra milinerien
Da hessa lerez ma feren.

6
Goude e teu eun advokad,
Eur pod hag a zo teodet mad.

7
Dallek e he deuet en ty
Hag e quenkent d'he zaludi.

8
Salud d'ach peren ru a mad,
Me am euz gwal hoant do tanvad.

9
Autro kommeret o c'hamzer
Rag ar per taouled a zo ker.

10
Distu en euz bet goulennet
Peguement ar beren daoulet.

11
Na c'houl nag aour, nag arc'hant,
Met eur pod yaouank deuz e c'hoant.

12
Neuze a c'houlen diganti
A c'hoant a deuz da dimezi.

13
Hi a respont en eur farsal,
Roet d'in amzer da sonjal.

14
Pa gomsfet d'in a zimezy,
Komzet deuz eur labourer d'in.

15
Dimeuz eur labourer douar
A neuz loened da gaz dar foar.

16
Jist mad en e dy da eva
Amann hag uo da werza.

17
Gantan he vin everuz mad
Roed e gont d'an advokad.

18
Roed e zac'h d'ar miliner
Evit m'a c'hallo mont dar gaer.

19
Mont a ra an advokad er porz
Ha ne ra ne med krial forz.

20
Hag ar miliner war e lerc'h
A war e gein eur zac'hat kerch.

21
Na dei ken an advokadet
Da Wengamp da glask per taouled.

22
Ar miliner gant e dour red
A c'hallo chomp da vala ed.

23
Barzed Breiz-Izel me o ped
Da zoned breman d'am eured.

24
A goude a c'halli moned
Gant ma labourer da gousket.

25
Ken a vo dit ma bro Gwengamp
Na weli ken da beren goant.